

Klas a 3<sup>vet</sup> - 8 a viz Kalan-Gouiañv 2001  
DEVER DESKADUREZH AR C'HEODEDOUR

**Sujed : Pennreolennoù meur hag arouezioù ar Republik a Frañs**

Evit daou boent e konto ar feson ma vo prezantet ho tever deoc'h.

**Teulioù**

**Teul 1. Bonreizh 1958**

- Mellad 2. Ur Republik dirannapl, laik, demokratel ha sokial eo Frañs. Gwarantiñ a ra ingalded ar geodederion oll dirak ar lezennoù, daoustou pezh orin, pezh gouenn pe pezh relijion int. Dougiñ a ra bri d'an oll gredennoù. An ardamez vroadel a zo ar banniel triliv, glas, gwenn, ruz.

An himn broadel a zo *La Marseillaise*.

Ger-nerzhek ar Republik a zo "Frankiz, Ingalded, Breudiezh".

He fennreolenn a zo : gouarnamant ar bobl, get ar bobl hag evit ar bobl.

**Teul 2. Hanter skeudenn Marianne**

Nend eus ket arouez par da vMarianne evit reprezantiñ ar Republik.



**Teul 3. Logo Frañs**

A-c'houde 1999 ema ret dezhoñ bout prezantet àr gement teul ofisiel d'ar Republik a zo.



**Goulennoù (6 poent).** C'hwi a respontay dre ur frazennig verr seul gwezh.

**Teul 1**

1. Pezh re eo ar peder fennreolenn vras d'ar Republik a Frañs distilhet doc'h deroù ar mellad-mañ ? (1,5 poent)
2. Pezh hani eo ger-nerzhek ar Republik a Frañs ? (0,75 poent)
3. Pezh anv eo an himn broadel anezhi ? (0,75 poent)

**Teul 2**

4. Pezh tudenn a arouezia ar Republik a Frañs ? (0,75 poent)

**Teul 3**

5. E men e vez ret d'ar logo-mañ bout reprezantet hiziv-an-deiz ? (0,75 poent)

**Teulioù 1, 2 ha 3**

6. Get sikour an teul 1, kavit penn da livoù skerb Marianne. (0,75 poent)
7. Daou arouez d'ar Republik a zo anat en teul 3. Lârit pezh re int, get sikour an teulioù 1 ha 2.

**Pennad arguzennaouet (12 poent)**

Savit ur pennad arguzennaouet 15 linennad bennak dezhoñ, doc'h en em ziazeziñ àr ar pezh a ouit ha get sikour an teulioù amañ a-us :

- lârit pezh re eo pennreolennoù ha ger-nerzhek ar Republik a Frañs ;
- diskouezit get div skwer tennet ag ar vuhez pemdeziek penaos ema lakaet e pleustr ar pennreolennoù distilhet er ger-nerzhek ;
- lârit pezh re eo arouezioù meur ar Republik ;
- pegoulz (en arbenn a bezh degouezhadennoù) hag e men (e pezh lec'hioù) e ra an dud e Frañs get an arouezioù meur-se ?